

Bloavezh 1986-1987

SKOL DIWYEZHEG SANT-RIWALL

PENNAD-KAOS gant Annie GUILLOU, RENERES AR SKOL

(5/06/1987)

AR FALZ : Demad deoc'h, Itron Reneres. Ped bugel zo bremañ er skol e Sant-Riwall ?

Annie GUILLOU : Pa oa bet savet ar skol diwyezheg ne oa nemed ur c'hlass. Tro pempzeg bugel oa d'ar mare-se. Bremañ ez eus 26, 15 e barzh skol ar re vras ha 11 er skol-vamm. 'Benn bloaz e vo un tammig nebeutoc'h (wardro 24) hag e vo re ar C.P. gant re ar skol-vamm.

Ar bloaz-mañ ez eus 4 bar C.P., 4 bar C.E.1, 1 bar C.E.2, 5 bar C.M.1 hag 1 bar C.M.2 hag a zo o vont kuit 'benn fin ar bloaz.



A.F. : Penaos ez a an traoù er skol ?

A.G. : Peogwir n'eus nemed ur skolaer o kaoseal brezhoneg e vez gwraet muioc'h a vrezhoneg ba klass ar re vihan, sañset evel ma oa bet lâret er penn kentañ e vije hanter amzer ba klass ar re vihan ha pemp eur da gomans ba klass ar re vras. Med peogwir n'eus den ebed oc'h ober brezhoneg e-barzh ar c'hlass kentañ derez, n'eus ket moaien da vont pelloc'h. Da zigentañ ne oa bet keston d'ober muioc'h, memes pa oamp diw oc'h ober brezhoneg, peogwir e vez stard ba penn kentañ kelenn en brezhoneg. Red eo deskiñ un toullad komzoù ha deskiñ traoù araog kelenn pe istor, pe traoù all e brezhoneg. Bremañ e vez gwraet ouzhpenn hanter amzer e brezhoneg e-barzh klass ar re vihan med ne vez ket gwraet nemed ur gentel bemdez e-barzh klass ar re vras, ur gentel bemdez adaleg al lun beteg ar gwener ha d'ar sadorn e vez gwraet un tamm teatr e brezhoneg.

Adaleg 1 eur hanter beteg diw eur ha kard e vez ur gentel gant ar C.E.-C.M. Re ar C.P. a vez gant ar re vras ewid ar galleg hag ar matematik ha goude, tro teir eur nemed kard e teuont assembles gant ar re vihan. Ase e vez ur gentel brezhoneg dre gomz.